


# GUERZ ZANT VAUDE



War don : Zantez Mari, Mam Doue

## DISKAN :

O zand Vaude biniget,  
Zand Patron hon farroz,  
Hon zikouret da gerzet  
Gan hent ar baradoz.

### I

1. Dimeuz ar wenn huellan, euz goad ar rouane  
En Ivcrzon en Breiz-Veur, oa zavet zant Vaude.
2. Kaeroc'h noblans a noa c'hoaz, pa noa kerent kristen  
Kerent fidel da Zoue, ha fidel d'he lezén.
3. Uz d'an enor, d'an arc'hant hag uz da hep noblans  
Ema karante Doue, he c'hras hag he zoujans.
4. Zand Vaude, ar yaouankan a zek a vugale  
A vihanik oe goestlet, gant e dud, da Zoue.
5. Adalek ma oa bugel, bars and oad tenéran  
Poan ebcd na esprenjont, evit pleal ganthan.
6. Evit pleal da viret he gorf hag he ine,  
Da harz an disteran gwall da c'hoarvezout ganthe.
7. Ha pa n-erruaz en oad da vean skoleet  
Er skol gant mestrou kristen, Maude a oa laket.
8. Diskamant na dal netra, anez doujans Doue  
Na skiertjen ar skiert, anez hini ar fe.

### II

9. Eur wech achu gan Maude, er skolach, he studi  
En em westlaz da Zoue, evid hen jerviji.
10. En em westlaz da Zoue, vid bean beleget  
Ha diouz an dud dizakr e oa dispartiet.
11. Distag krenn diouz ar bed, na oa ken darempred  
Gant ar brinsed he gerent, na gand he vignoned.
12. En eur c'horn deuz ar pales 'n em rœ d'ar beden  
O peurvestroni he gorf dre nerz ar binijen.
13. Goude eun neubed blaiou o kempen he ine  
Kaer e oa dirag an dud, ha kaer dirag Doue.
14. Ma krogas c'hoant vraz er bobl d'hen lakat da roue  
Gand eur brinsed da bried, euz givenn ar rouane.
15. Pa oa galvet gan Doue da vean beleget  
N'intentas ket chom amzent ha bean distroet.
16. Maude, goestlet da Zoue, a gas d'han he beden :  
Doue d'he vignon fidel a ro raktal zouten.
17. He gorf a deu da vean, en eun tol, goloct  
Goloed a c'houliou zo euzus da velet.
18. Setu ar bobl o kemer kenkent donjer outhan  
Hag ar brinsed gand ar bobl, hag o trei kein d'ezhan.
19. A-greis kalon da Zoue, Maude 'lar trugare  
Ha dre eur burzud neve, eo adrentet pare.

### III

20. O 'n em westlan da Zoue, en em roaz a-grenn  
Hag e laras kenavo d'he vro ha d'he gerent.

21. Hag e treuzaz ar mor bras da zond da Vreiz-Izel,  
Evid digas d'hon zadou frouez-dous an aviel.
22. O chilaou komjou ar zant, diski rajont ganthan  
Karet an otrou Doue ha karet ho nesad.
23. Pa skuilhaz an dour-vade war dal hon zadou koz  
E tigoraz dirak-he forjou ar baradoz.
24. Ar gaou euz ho sperejou, gand Aviel Jezuz,  
A dec'has evel an noz rog an heol lugernus.
25. Ar gasoni 'n ho c'halon, gant karante Jezus,  
A deuzaz evel ar skorn dindan an heol grouzuz.
26. D'ac'h, o kalon hon Zalver, trugare da viken  
Da vean roet Maude da brezek ho lezén.
27. Da vean laket ar fe en bro ar Vretoned  
Hep relijion, an dud zo gwasoc'h vit loned.
28. D'ar Vretoned, hon Zadou, Maude reaz c'hoaz vad  
O lezel ganthe ar skuer dimeuz eur vue vad.
29. Er bed-man, na n-euz netra, ken krenv  
Ha skueriou kerent kristen da ren an dud d'an env.

### IV

30. Ebarz hon bro Breiz-Izel e kaver c'hoaz roudou  
Deuz santelez zand Vaude, ha deuz he vuzudou.
31. Erad hag ar rouaned, er hep sort vitansed  
A oa leiz an enezen a zoug c'hoaz he hano.
32. Ar zand, dre ar pedennou a gasas da Zoue  
Ho distrujuz, ho skarzaz deus enezen Vaude.
33. Da veur a zen mac'hagnet e roaz ar c'herzet  
Ha da veur a hini dall e roaz ar guelet.
34. Ar c'hlevet a zigasaz da veur a zen bouar,  
Da gonjuri an diaoul, Maude noa ket he bar.
35. Goude eur vue ken kaer, zand Vaude a varvaz  
Doue ganthan 'n e galon, hag en he zorn ar groaz.
36. Trugare d'ac'h, zand Vaude, goud eur vue vad  
Roet oc'h euz d'imp ar skuer dimeuz eur maro mad.

### V

37. Ar jonj deuz ho santelez ha deus ho purzudou  
A zo bev en Breiz-Izel, en kalz a barrojou.
38. En Duod, o zand Vaude, ganimp holl er barroz  
Oc'h pedet hag enoret vel gant hon zadou koz.
39. Ni o gar ho skeuden gaer, en stern an oter vraz  
Eur mintr ganac'h war ho penn hag 'n ho torn eur vaz.
40. Eur mintr, eur vaz da verkan e poa karg an abad  
Galloud war hon kenvreudeur d'ho ren gand an hent  
[mad.
41. Pa n-co guir war hon farroz e z-oc'h ar zant Patron  
Ni ho kar, o zand Vaude, euz a greiz hon c'halon.
42. Skarzset kement amprevan a noazfe d'hon iec'hed,  
Miret dreist-holl hon ine dizotr euz ar pec'hed.
43. Ha pa vimp er karadoz, zand Vaude biniget  
Ni gano d'ac'h mil bennoz hag ho karo bepret.